



GUERS NEVE

COMPOSET VAR SUJET

C'HOEC'H MALHEUR,

ERRUET EN ESKOPTI GUENET.

Var ion : *Guers Santez Anna ar Palud.*

Bretonet , me ho suppli , tostaat da glevet
A kement a zelaouo a vezo estonet ,
O klevet ober recit demeus a c'hoec'h malheur
Erruet er memeus de , hac er memeus amzer.

En Eskopti a Voenet , evit rei da intent
Eur pevar pe bemp devez arog gouel an oll Zant
E c'herru' ar malheuriou , selaouit christenien ,
Va speret a zo troublet o tonet d'ho c'hompren.

Eun domestikes fidel , ma voa er vro ini ,
A zo bet bars en ty-se pell bras o servichi ,
Aben eur pennat goude e ze bet demeeet
A e ed d'he zieges souden gant e friet.

Ar vreg demeus an ty-man a zo bet gouilloudet ,
Pe devez gred e beach e devez kommandet
Kerc'hat anei var e zro , dre ne gave hini
Da blijout d'he zantimant evel-hi d'he soigni.

Pa vel ar penn e kouea e ze epouvantet ,
Ma saillas en e guele evel eun den follet ,
Ha ma teuas da semplâ , ha memeus da gouea
Var e c'hraouadur daou ze , hac ive d'en laza .

Pa zistroas e fried demeus ann ofern bred
En eur digueri an nor e deus dean laret :
Tolet e ar plac'h er punz ha lazet eguile ,
Dibennet ar malevrus ha dalc'het ar plac'h-se .

An den-man , p'an deus guelet , a zo bet antreet :
Pa ya da zigor an nor en deus-i bet kavet
Evel ma tigor an nor e deveus-i bet skoet
Ha gant eun tol seulamant e deus-i bet lazet .

Evel ma tistro en dro da gonta d'he bried
Evit lavaret dezi petra en deveus gred ,
Pa zellas deus ar guele voa e vreg o vervel
Ha glac'haret e c'halon gant keun d'e daou vuguel .

An den p'an deveus guelet voa e vreg o vervel
Ha lak dorn en e c'hodel hac a tenn e gontel ;
N'e flantas en e galou ha ma teu da gouea
Elec'h bea gortoet Doue d'en punissa .

An dud , goude o lein , o font d'ar gousperou
A voa kustum da antren da efa bannac'hou ,
Pa veljont ar malheuriou teujont da estoni
Ma yejont en eur vanden en kær da zeclari .

DÉPOSÉ :

V. G.

Aze er c'hao , emezi , etre diou variken ,
E meus guelelet va friet , kent monet d'an ofern ,
O plaça e oll arc'hant deus e vare'hadoures ;
Disken a kê da vite , emei , miserables.

Evel ma tisken d'ar c'hao da zestum an arc'hant
Ar vreg-man deus e guele a zao en eun instant ,
Hac e deus bet ar gouraj , dre c'hraç santes Anna ,
Da alc'hoea varnezi ha d'e derc'hel ennan .

Eur plac'h bian e devoa deus a-no bla oajet ,
Vit kement a red dezi ne ambandonne ket :
Ed , emezi , va buguel , da vid o tad d'ar gær
Ha larit e ma o mam var ar poent da vervel .

Evel ma za ar buguel da gommanç penn an hent
E ze erruet ganti ar malevrus kerkent ,
Hac e c'houlen digant-i : Pelec'h ed , emean ?
Ar buguel var e malheur a anzavas outan .

Forcet en deus ar buguel da zont en dro gantan ,
Ma tigorje vam an nor , pa glevje anean :
Me ne zigorin va dor na did na den ebet
Ken a zistroï va fried demeus an ofern bred .

Ar buguel a c'houl digor , ampoëzon didalve ;
Te a vo kirriek dezi ma kollo e bue ;
Me ya da zigor ar punz ma ne zigores ket .
Var e c'hir , ar malhevrus e deus-i bet tolet .

Neuze en devez skeuliet an doen gant kerden
Evit ma raje un toul evit ellout antren ,
Evit ma raje un toul da ober e antre
Gant ar goler deus ar vreg , m'an dije e bue .

Ar vreg-man a bourmene dre bevar c'horn an ty ,
N'eur bedi santes Anna hac ar Verc'hes Vari ,
N'eur falç-kontel e krogas , hac e deus-i skoet ,
Ha gant eun tol seulament e deus-an dibennet .

An den-man a dremene o vont d'an ofern bred ,
Abiou da dy ar plac'h-se , hac e ze antreed ,
Hac en deus-i pedet da zonet var e zro ,
Evit kaout soign anezi hac e bugaligou .

Evel ma ze sortiet an den-man eus an ty
E ze bet en em glevet hac e fried hac y
Da vont da dy ar vreg-man en eur goal zantimant ,
Dre ar voyen e vuient e klie kaout arc'hant .

Destinet e deus eur plaç evit en eur gavet
En hent an daou valevrus pa zint dispartiet ,
Hi a yaje da zestum an arc'hant deus an ty .
Ha 'en jomje en eur plaç da c'hortos anezi .

En eur antren e rentas ar bonjour d'he mestres ,
Kent ma tiskuelje dezi e voa eun draïtours ,
An ardizou e devoa hac an effrontiri
Da zonet d'he zrahissa goude e zaludi .

Ar vreg-man a ziskuezet kavet joa vras outi ,
A dre ma ne vouie ket an drahison impi ,
Hac e deus-i bet pedet da zibi , da efa ,
Kent evit ma labourje demeus ar pep guella .

Ober a-ra tro an ty , kemer a-ra eun hach
Hac e kichen ar guele kerkent e tistroas ,
Hac e lavaras dezi e rankje kaout arc'hant
Pe e kolje e bue ganti en eun instant .

Ar vreg-man ker saiziet o klevet anezi ,
Goude bea goulennet e bue diganti
Er c'hus-tol e deus pozet ractal anterkant skoet :
Kass aneze ganes-te , ha va les voar ar bed .

Goude dastum an arc'hant e tistro adarre ,
Neuze zouden gant an hach da guichen ar gouele ,
Hac e c'hannoncas dezi e rankche kaout ouspen
Pe e raje daou anter-en eun tol deus e fenn .